

Yannig Fur : Jean-Marie Kerdudo (Kleger 1864 – An Alre 1924)

Me Mestrez

Modernnaet eo bet an doare-skriva.
Bet embannet e 1902.

Me Mestrez

Er gêrig-se, 'tre deu vane¹
'Tu-men d'er marhad-lé
Inont, tostig d'er ster
En un tiig dister
Inont koant el ur rouanez
E vager me mestrez.

Braùig ha fur he beg
Bougenneu ru' ha hweg,
Ha deulagad glaz en he fenn,
Gwiù el ur steredenn.

Ha pe ya d'er feton²,
Berù e hra me halon ;
Me 'heuli, mez pell ha kuhet,
Ged eun ³a voud gwelet.

De heul geti 'yehen
Dohti e kaojehen⁴
El un oén pe mehé ur sell
Ha moueh en durhunell.

He fod e zo karget
D'ar gêr 'ma distroet ;
Ha me glask hoah 'barh ar feton
Gweled he skeud én don.

Dindan ur bod spern-gwenn,
'M-es kelvet ur sonenn :
« Karein e ret, 'mé en estik,
Nag euruz oh, Yannig. »

« Taùet, eutru en Ein,
Hui hra goab, ha pas kin ;
Me halon e zo ankinet,
Me 'gar, n'on ket karet.

Ar 'r barr, er poker-koed⁵
E lar en ur hoarhed :

¹ deu vane : daou venez.

² feton : feunteun.

³ eun : aon.

⁴ kaojehen : kaozfen.

⁵ er poker-koed : ar gazeg-koad.

« Hineh n'e ket eid gober lez
E spont 'raog e vestrez.